

u. D. 1771. approuvé par M. l'Evêque



HISTOAR ADMIRABL
A V U H E Z

A. n. 6

SANTES HELENA.

P1

Voar Ton Yan Guerin, pe un Ton
nevez.

C. G. R. M.

B Remâ e fell din discleria
Ar vuez Santes Helena:
Bezit attantif d'e c'hlevet,
Ho calon fur a vezo touchet.

Clevet a reot he buhez
Carguet eus a dristidiguez,
Hac ar martyr e deveus bet,
Hac a so ganti c'hoarvezet.

Me lavaro deoc'h pen-da-ben
E voa hi caëra femellen
A guement a ouiset da gaser,
Gant ar bed oll oa enoret.

A

275-7-26

202, 123

Beza oa a vrasa qualite,
 Pa voa hi Merc'h da ur Roue;
 Rac Merc'h voa d'ar Roue Anton,
 E Constantinopl oa e dron.

Pa oa Pap e Rom Sant Clemant,
 Hennes a oa eus he c'herent,
 E oue er bed-mâ ganet
 Er bloavez pevar cant ha dec.

Goude an Incarnation
 A Jesus hon Roue guirion,
 Er guær eus a Constantinopl,
 Hac estimet bras gant ar bopl.

Pa oa en oat a bemzec vloas,
 He mam diganti a varvas,
 Ma fallas d'he zat e c'haouet,
 E vit ma vise e briet.

Mont a eure da gaout ar Pab,
 Hac en esper caout e c'hrat,
 E vit caout e gonsantamant
 Da zimisi d'e verc'h yaouanc.

Ar Pap neuse pa er c'hlevas,
 A meurber en em estonas:
 Ne gasset Christen var ar bed
 A guemere e verc'h da bried.

Gant an Ilis eo difennet,
 Ha gant Doue eo ordrenet
 Ne vezo jamæs eureuget

An tad nac ar verc'h nepret.

E ve demeeet ar verc'h d'an tad,
 Hennez so ur c'hrim execrabl,
 Ur c'hrim a enep al lesen,
 Siouaz! etouez ar Gristenien.

Pa en devoa clever Helena
 E arruse sur quemeniâ,
 Var ar mor en em ambarquas,
 Hac e Flandres en em rentas.

Eno pa voa hi arruet,
 En un Ecluse en em rentet,
 Pa oa a dost da un Abbati,
 E commanças son ar C'hlec'hi.

Neuse an oll Leanezet
 A oue sur quer bras estonet
 O clever o C'hleyer o son,
 Hac int mont o! en oræson.

Hac int mont ha seller neuse
 Piou a oue erru er c'hontre,
 Ma remercsont ur femelen
 A zeue d'o chaouet pen-da-ben.

Mont a resont en procession,
 Gant respet ha devotion,
 Evit monet d'e rancontri,
 Gant ur joa bras d'e saludi.

Ha pa velas hi anezc,
 E voe estonet bras ive,

Hac oc'h o guelet a vanden
O tont d'he rancontr evellen.

Neufe e recefsont anezi,
Ha conduet d'an Abbati,
Rac guelet a rent oll certen
E care an Autrou souveren.

Mæs ne chommas quet pell gante,
Ne changeas timat a gontre;
Ha rac ar Roue Catebron,
Un den cruel ha diræson.

Mont a eure voar bord ar mor
Evit savetei e enor,
Ha ma pedas Merdaidi,
Mar plich gueneoc'h va ambarqui.

Un dra terribl a arruas
Pa voant e creis ar mor glas,
Rac an dut oll a oa lazet
Gant ar c'horserien arraget.

Exceptet Santes Helena,
A voa ur femelen ar gaëra
O songeal caout e guerc'hdet,
E voa hi ganto reservet.

En oræson en em laquas,
Da Jesus en em recommandas:
M'ho ped, va Jesus, va Roue,
Conservit ma virginite.

Pa oa achuet he feden,

D'hor Salver Jesus evellen,
 Un tan eus an Eê gouezas
 Al lestr hac an dut a losquas.

Hi oa preservet cousgoude
 Gant ur blanquen deus he buhe,
 E arruas e rivyer ar Sign
 E quichenic bord ur jardin.

Ar rivyer a ye bete Londres,
 Hac eno e voa ur verges,
 Hac ur feunteun caër a gavas,
 En e c'hichen e tisquizas.

Ar Roue Heri e guelas
 Ebars en un dristidiguez vras,
 Afezet ec'has ar feunteun,
 Ha ne voa den en e c'hichen.

Tostaat a ras neuse outhi,
 Hac e c'houlennas diganthi,
 Livirit din presantamant:
 Pe a leac'h oc'h, merc'hic yaouanc?

Me a so eus a Constantinopl
 A guerent pinvidic ha nobl,
 Hac a so amàn achapet
 A dre daouarn ar Barbaret.

Allas! va c'halon a fazi din,
 Rac naon emeus, ne allàn mui:
 Pell bras so n'emeus debret tam,
 Ha va c'halon em c'hreis a rann.

Ar Roue Heri pa e c'hlevas,
 D'e aumoniari a gommandas
 Monet pront da guerc'hat dezi
 Peadra evit e foulagi.

Neuse en e c'hallas gantâ,
 Ebars en e dy da logea,
 Hac o tont d'e recommandi
 Evel unan a dut an ty.

Goude-se oant demezet,
 Souden e oue grêt an euret,
 Hac ar fest a badas gante
 Bere an nombr a ugent de.

Daou vloas antier ez int bet
 En o fligeadur assuret,
 Quen na zeuas da veza brasez,
 Neuse e devoa goal vuhez.

Digant e vam ar Rouanez
 E devoue cals a baourentez,
 Hervez ma raport an histoar,
 E devoue cals eus a c'hlac'har.

Ar Roue Heri a yas timat
 Da gaout an tad santel ar Pap,
 Evel ma en devoa recommandet
 D'ar gombat ouz ar Sarazinet.

Lefel a ras sur e secret
 Tri merq er guer eus e gachet:
 Rei a ras unan da Helena,

Un all da Vari Clocestra.

An trede ivez a roas

D'ar C'hont a oa e vignon bras,

Da behini e recommandas

E brier gant affection vras.

Glac'har bras a oue er palas,

O lavaret adieu assambles,

Hac epad eiz vloaz varnuguent

N'en em velint sur e nep hent.

Helena en devoa ganet

Daou vuguel a oa caër meurbet ;

He mam gaër a roas da g'idi

Penaos e devoa bet daou gui.

Ar Roue Heri pa glevas,

A oue sur estonet bras,

O clever e devoa ganet

Daou gui evelse e brier.

Neuse e voa hi condanet

Da gaout he brec'h deou troc'het,

Hac amaret he bugale

Unan dezi a bep coste.

Ambarquet oue var ar mor bras,

Ebars e Breis e risquennas :

Ar barq en devoa hi digacet

Da Londres a so retourner.

Cri vise a galon na ouelse,

Oc'h e guelet nep a vise,

A iv

O rei he divron d'he bugale
 Hac hi prest da vervel digante.

Da gousquet neuse en em laquas,
 Daou leon eus ar forest a zeuas
 A gaffas gante an daou vuguel,
 Quement-mâ certen oa cruel.

Un Ermit a voa neu'e er c'hoat,
 Ha diouz ar c'hri a zeuas timat,
 Hac a gavas an daou vuguel
 Etre griffou daou leon cruel.

Unan al leon a hanvas,
 Eguile ar vrec'h a c'halvas:
 O daou e voant gantâ maguet
 Epad c'huezec vloas affuret.

Ebars epad an amser-mâ
 E oue e Naonet Helena,
 Hac un hostises a gavas,
 Truez outhi a guemeras.

Chom a eure a servicha,
 Ebars en ty oa an distera;
 Dispriset voa gant peb hini,
 Laquet voa da dorcha listri.

Ober a re gant diligeanç,
 Hep na rebel na repugnanç
 Quemet a ordrenet dezi
 En o gre oll hep contraigni.

Guelet amâ grœc ur Roue

Carguet eveus a baourente,
 Rentet quen humbl ha quen isel
 Dirac ar bed universel.

Sellit bremâ an humilire,
 Hounez a blich bras da Zoue,
 Rac an humbl a so exalter,
 Hac ar re superb discarer.

Ar Roue Heri distro a Rom,
 Ha gantâ ar Roue Anton,
 A arruas en e bæles
 Ebars er guær eus a Londres.

Allas! eno pa arruas,
 Ar c'hont Clocester a gavas,
 Ha goulen neufe digantâ
 Peleac'h voa eat Helena?

Nao messager a oa digasset
 Dirac ar Roue da lavaret
 O devoa digasset peb a liser
 D'ar c'hont Clocester a dra scler.

Mæs un all a zeuas goude,
 A lavaras ar virione,
 Penaus e voa bet trahisset
 Gant ar Rouanez coz assuret.

Ar Rouanez coz so coudaunet
 Da veza e beo losquet,
 Abalamour ma e devoa
 Laquet troc'ha brec'h Helena.

Me lavaro deoc'h ar recit
 An daou vuguel hac an Ermit,
 Ha penaos voa an disparti
 Ebars er c'hoat gant cals a gri.

Felix a yeas var bord ar rivyer
 Da bourmen gant an daou vuguel:
 Amàn, emezàn, ho quivis,
 Guenèn d'am zy ho tigallis.

An daou vuguel a respontas
 D'an Ermit outo pa gomfas,
 N'en d'ê quet c'huita, Ermit-mat,
 Eo a so c'ha sur hon tat?

An Ermit neuse a lavaras
 Deze gant tristidiguez vras:
 Allas! m'ho c'avas amàn leset
 Gant ar bleizi ha leonet.

Ha gant truez m'ho tigallas
 Ho taou guenèn d'am Ermitach,
 Hac emeus ivez ho maguet,
 Hoc'h elevet hac instruet.

An daou vuguel a lavare
 An eil d'eguille aneze:
 Pa n'en d'ê an Ermit hon tat,
 Deomp-uy bremàn da glasq hor mat.

An Ermit a oue trist meurbet,
 Pa o c'hlevas o lavaret
 Ezajent, allas! da glasq o mat,

Pa ne oue an Ermit o Zat.

Pa voant o tiscours evelse,
Arruout Merdaïdi ene:

Bremâ ez eus c'huezec bloa
E lequezomp amâ Helena

Gant anquen vras digonfolet
D'e daou vuguel e doa coller,
N'e devoa brec'h nemer unan
Da ficour daou vuguel bian.

Neuse e lavaras Martin,
Btice, va breur, deomp bete ar fin,
Elec'h ma pligeo gant Doue hor c'hass,
Ma cassimp hor mam ur veich c'hoas.

Merdaïdi, ni ho supli,
Pliget gueneoc'h hon ambarqui,
Ma zaïmp en hano Doue
Da glasq hor bro hac hor c'hontre.

Ar Merdaïdi a respontas
D'an daou vuguel pa o c'hlevas:
Deut en hon læstr hac ambarquer,
Ny ho lacai en douar assuret.

En Allemagn ec'h arrusont,
Hac arc'hant dezo a resont;
Ouspen e resont da leina
D'an daou vuguel gant cals a joa.

En Baviere pa voant arru,
E zesont o daou a ru da ru,

Ma o guelas ar Rouanes
Ebars er ru eus e fales.

Ma commandas d'he messager
Mont da guerc'hat an daou vuguel,
Rac quer caër oant evel an de,
Clorianda o admire.

Digasset oant neuse dirazi,
Roet voa deze da zibri:
Neuse evel tud affamet
Ne squient o tibri boet.

Re hir ven ma conten antier
Ar bresel voa er bro Bavier;
Mæs beza voant victorius
An daou vuguel dre c'hraç Jesus.

Martin a voa un den vaillant,
Hac ebars er gombat sanglant
Laza a ras cals a Sarazinet,
Ha cals eus an Turquianet..

An Itron Varia Boloigne
O sicouras sur en deiz-se,
Hac evit caout ar victoar
Dre c'hraç Jesus var an douar.

Da Tour e teufont ac'hane,
Ur guær a so en Turene;
Sant Martin a voa aumonier
Da rei soulach d'ar beorien quer.

O mam ivez a arruas.

En Tour gant ur baourente vras,
 Ma oa Martin o tistribui
 An alufen da bep hini.

Goulen a eure diouti,
 Pa zeuas da fellet outi,
 Pe a leac'h ouc'h-hu deut amâ?
 C'hui n'en d'oc'h quet eus ar vro-mâ.

Commanç a reas neuse e galon
 Da zonet d'e biquat quen doun,
 Neuse e teuas fonch dezâ
 Ebars en e vam Helena.

Diaguent en devoa clevet,
 Evel ma hon eus raporter,
 E voa troc'het ur vrec'h dezi,
 Hac en mont da fongéal enni.

Neuse en em anavezont,
 Gant joa bras en em saludfont,
 Autrou Jesus, eme Helena,
 Va bugale quæz a velân.

Ne zefiren quen evit mervel,
 Nemet guelet va daou vuguel:
 Autrou Jesus, Roue an Tron,
 Houmân so consolation
 Da ur vam e devoa coller,
 He daou vuguel e deus cavet.

Adieu, emezi, va bugale,
 Mont a rân bremân en han Doue,

Ho pêt ac'hanon fonch ha memoar,
Va bugale quer, var an douar.

M'em bezo fonch ac'hanoc'h ive
Pa vin e Rouantelez an Eê,
Evit ma vezimp oll assambles
Er barados gant an Æles.

F I N.

